

PRONOSTICOU



NOSTRADAMUS.

Nostradamus (M. Nostradamus.)



GUIR BOLTRET
MICHEL NOSTRADAMUS,
OLABOURAT VAR EFFEJOU AN ASTROU.




GUÏR
PRONOSTICOU
AN DEN SAVANT MEURBED
MICHEL
NOSTRADAMUS,

EVIT NAO BLOAS,

E pere e vero guelet ar bloaveziou founnus po
disroues, temps an ear, priz an Ed, ar Guin,
ar Gloan, al Lin, ar C'hanap, ar Patates,
hae eus a bep seurt Marc'hadourezou all,
evit atilite bras ad Labourien, etc.



Troet eus an Imprimet gallic e Valang,
e ty P. Massacr, ru an Ifern,
Hac a gaver e ty Lédan, e Montroulez.



EPITAFEN

MICHEL NOSTRADAMUS,

Astrologian ha Mathematician.

AMA e repos relegou an den savant meurbed MICHEL NOSTRADAMUS, a behini ar blien aour ha cazi divin a zo bet a bep amzer estimet dign da draci d'ar bed oñ, herves pouvoar an Astrou, an isçouou da zont dreist ar rond eus ar bed universel.

Guenel a eure er-guer a Sant-Remi, er Provanç, d'ar yaou' ar 4 a vis Qerzu 1503, da 3 heur eus ar minatin, eus a Jaques Nostredamus, Noter, hac eus a Renea Sant-Remi.

Mervel a eure e Solon-du-Craux, er Provanç, ar 5 a vis Even 1566, cazi d'ar sav-eol, oaget a 63 vloas 6 mois 1 deves 23 minut 10 second.

Ur mis qent mervel, e tiouc'hanas e varo dre ar c'homzou-mâ : *Hic prope mors est ;* da lavaret eo : Amâ tost e ma va marr.

Predictionou general evit ar bloa 1832.

AR Gouân a vezô divezad ha glaoec. Beza e vezô calza erc'h, hac e chommo pell-var an douar. Al loened gouez a vezô qen affamet, ma vezint guelet a vandennou dc'h antre er o'hreyer da zevori ar chatal. Tud memes o devezo ar maleur da veza devoret gañto.

Commançamant an Nevez-Amzer a vezô yen; ar c'hreiz a royo deomp un nebeut grizill, hac ar fin a vezô tom, arneüs ha glaoec bras.

An Hân a vezô eus un domder dreist-muzur, ar glao bras meurbéd, ar grizill, ar gûrun hac al luc'bed à vezô peur liessa. Qen tom e vezô, m'devezo an anealed poan o caout dour ha paturach ; an douarou a vezô quer sec'h, n'o devezo an ear ous un desert. An eól a vezô quer tom, ma renco ar beacherien bale en nos, evit tec'hel eus an domder vrás.

An Discar-Amzer, en e gommançamant, a vezô quer tom evel an hân, ar pez a rayo d'an eost beza rostet. Ar c'hreiz a vezô un nebeudic frescoc'h, exceplet ur vrwmenniq. Benac. Ar fin a vezô rust, ha clâvus. Au eost a vezô pell da veza mad.

*An edou, ar gist, hac anfin, un oll varc'hadeutes
a vezô gouell gher.*

Predictionou evit ar bloa 1833.

AR GOUÂN a vezò goual disagreapl; e gomamançamant a vezò scor nec, carguet a frim hac a èrc'h; ar bleizi a rayo un nebeut ravach var ar meaz, dre na ellint caout nep bewanç, abalamour d'an èrc'h bras a vezò var an douar. Ar c'hlreiz a vezò glaoec, ar pez a vezò caus eus un discorn spontus. Ar fin a royo deomp calz a avel, pehini a boulso an doureyer; beza hor bezo iveau un nebeud scorn, pehini a vezò favorabl da vadou an douar.

An Nevez-Amzer a vezò passablamant caer, ha profitabl da oïl vadou an deuar. Ar c'hlreiz a vezò un nebeud mesqet eus a c'hlao madoberus. Ar fin a vezò qen agreabl evel ma eller resonablamant en esperout.

An edou o devèzo un appuranc gaer; ar glao a c'hoarvezo pa vezint e fleur, na noazint qei outo gement evél ma sonjot.

Beza hor bezo un Hân tom aoüalc'h; arneou stanc gant glao pounner; ar gurun a vezò clèvet avisiou; gouscoude an eost na souffro netra a guementse; beza e vezò er c'hontrol mad bras.

An Discar-Amzer a vezò passablamant caer, daoust ma vezò avek incommod ha brumen, ar pez a vezò caus a glénvejou. Calz tud a varvo.

Predictionju general evit ar bloa 1834.

AR GOUÂN A VEZO COUNABRUS EN E GOMMANÇAMANT. AR C' BREIZ A VEZO TEVAL, YEN HAC ENOUUS. HIR E VEZO; AL LOENED NA GAVINT PATU-RACH NEMET GANT CALZ A BOAN, GANT AN DEODEUR EUS AN ERC'H A VEZO VAR AN DOUAR.

AN NEVEZ-AMZER A VEZO PASSABL EN E GOMMANÇAMANT; AN EAR A VEZO DOUC. AR C' BREIZ A ZISQUEZO DEOMP AR C' BAMPAGNOU QEN CAER EVEL MA ELLET EN DEZIROUT. AN DUD DIVAR AR MEAZ A VELO GANT ADMIRATION AN NATUR OUS EN EM'ORBI EUS O FAREÜR, HAC' ALLAPOUCEDIGOU O NEVEZIO C' HANOUENNOU A JOA, EVIT CELEBRI AN DISTRO.EUS AN AMZER GAER. AR FIN A ROYO UN NEBEUD GLAO CONVENABL D'AN-OLL GREUNIOU.

AN HÂN A VEZO TOM BRAS EN E HED, AR PEZ A VEZO CAUS DA UN NEBEUD TERZIEN HA D'UR C' HJÉNVED ALL BENAC. ARNEU TERRUBL A VEZO, HA GRIZILL PEHINI A RAI RAYACH E COSTEZ AR C' HUS-EOL.

AN DISCAR-AMZER A BAEQ GANT USUR D'AL LABOURER INGINUS AL LABOUR EN DEVEZO BET GRËT ER SESONNIOU'ALL. AU EDOU A RENTO EN UN NOMBR ESTONUS.

Er bloa-mâ an demeziou a vezo nombrus hac eurus.

Batimanchou a arrvo eurusamant er pors.

Ur c'hélou mad a gargo an oll a joa.

Predictionen general erit ar blos 1835.

AR Gouân a vezò variant er gommancamant,
Adre scorn du, erc'h ha bruinen. Ar c'hereiz
à vezò sujet da dempest ha da scorn calet. Ar
fin à royo deomp calz à c'hlaor bac a erc'h, ar
pez a vezò caus da zic'hlamou dommajabl bras
d'an neb a chom var bord ar rivieroù. Ar bea-
cher en devezo calz da souffr.

An Nevez-Amzér , en e gommançamant , a royo deomp un nebeut frim ha caouajou glao evit peur-achui da zissipa rigor ar gouân . Ar fin a vezò caer ha favorabl da vadou an douar .

An Hân a royo deomp, en e gommançament, un domder favorabl benac. Ar c'hreiz a royo glao, luc'het hac un tarz curun benac; hep ober gaou. Ar fin a vezoz mad' d'an eost.

An Discar-Amzer, er gommançamant, a vez
caer meurbed , mes sujet da chenchediguez ,
pere gouscoude a royo un amzer favorabl evit
an eost , hac à vez abondant bras. Ar c'hreiz
a royo aveliou foll , brumennou pere a occasior
meur a seurt elónvejou. Ar fin a vez glaoec.

*Ut loen furius ha sauach a rayo calz a ravach en
ur broving.*

*An neb o deveus chatal a dle genier soign outo,
rac calz a vleiz vo er bloa-mâ.*

Predictionou evit ar bloa 1836.

AR Gouân a vezo rust, hir haø enouus bras;
An érc'h a vezo pell bras var an douar, mes
ar c'heuneud nà vezo qet quer.

'An Nevez-Amzer a vezo caer aoüalc'h en e
gommançamant; gouscoude e vezo variet dre
un nebeut'scorn. E c'hreiz a royo deomp grizill
alies; ha var e fin e couezo calz a c'hlao.

*Ar c'hanap hac al lin a vezo muioc'h abundant
eguet na dleyet credi.*

An Hân, en e gommançamant, a vezo tom
moderet, gant un nebeut glao madoberus. Ar
c'hréiz a vezo douç ha moderet. Ar fin a vezo
tom brao evit meüri an eost, pehini a vezo à
bondant, ar pez a rai d'an edou beza guëlloc'h
marc'hat eguet er bloaveziou diarec.

*Un demezi eus an estonnussa a rayo calz a vrud
en Europ.*

An Discar-Amzer a royo deomp un donader
benac, pehini, pell da noaz, a veüro ar rezin.
Er c'hreiz har bezo ყr vrufnec benac, bac ar
fin a vezo humid gouell alies.

*Ar C'hommerç a yélo erfat; ha calz a lestrou eus
an Iudes aerruo en hor bro, cague eus a bep seurt
marc'hadourez.*

Predictionou general evit ar bloa 1837.

AR GOUÂN A VEZO YËN, COUMOULUÅ HAC HUMID,
AN AVEL MERYENT, VARDRO AR C'HREIZ, A ZI-
 GAÇO DEOMP SCORN, FRIM HAC ERCH, PERE A
 CHOMMO PELL-AMZER VAR AN DOUAR.

An Nevez-Amzer a vezoz douç, tamperet, ha
 mad evit labouriou an douar. Ar Piz, ar Fao,
 an Harico a vezoz deus ar guelta qalite. Gallout
 e vezoz hardimant e lezel da zec'hihac o chont-
 servi evit o hada er blaves varlerch, rac pro-
 duï a rint calz coulz hac ar patates.

A HÂN, peguement benac ma vezoz humid,
 na vezoz qet nebeutoc'h favorapl da vadou an
 douar. Uu arneu benac a vezoz, hac an avel a
 vezoz gouell grén; mes dàoust da guementse,
 an edou a vezoz caer ha founnus.

*Ar bloa-mâ ar C'homerc a brôspero calz; guclet e
 vezoz ul labour continucl er porsiou-mor, rac a bep
 lec'h ec'h arruo hac e partio calz a vatimanchou.*

An Discar-Amzer a vezozq er caer ha ma el-
 fet en desirout. An eost a vezoz qen abondant,
 ma vezoz gant calz a boan cavet bircher aoüalc'h.
 da zestum an edou a broduo.

*An amzer a vezoz commod nieurbed evit an hâdd,
 ha güün Bourdel a erruo en abondanç en hor porsiou-
 mor. Listri an Dquar-Nevez. a ereuo en hor bro.*

Predictionou general evit ar bloa 1838.

AR GOUÂN A VEZO HIR ; AN ERCH A CHOMMO
APPELL BRAS VAR AN DOUAR ; AR GLAOYOU BRAS A
LAQAYO AR RIVIEROU DA GRESQI SPONTUS ; AR FIN A
VEZO GOUEL ENOUUS.

AN NEVEZ-AMZER, A VEZO QER CAER, M'EN EM
GREDO AN DUD EU UR BARADOS. AR GOUEZ FROUEZ
A ROYO AR C'HAERA ESPERANÇ ; AR PRAJAYER A VEZO
QER CAER, MA SAILLO AL LOËNED GANT JOA, AR PEZ A
RENTO AN DUD LAOUEN ; MES AR SINOU CAER SE A
DREMENO PREST, RAC AN ED A VEZO SUILLET GANT AN
ARNEOU FRECANT A DEUYO DEMP EUS AN NORD.

*An neb a vezo zô bet prudant aoüatch o devezo
grêt pourvision doubl er bloa aroc.*

AN HÂN A VEZO QER TOIN, NA GAVO AR BEACHER
UL LOM DOUR DA STANCA E SEC'HED, NEMET GANT
POAN ; AR FROUEZ A ZISEC'HO QENT MEÜRI, AR GÜIA
HAC AR GISTR AVEZO GOUELL GUER.

Clevet e vezo comz eus ur grenamant douar.

AN DISCAR-AMZER A VEZO FAVORABL EVIT DESTUM
AN NEBEUD ED A VEZO ACHAPET OUS AN AMZER FALL.

*Aruout a rayo en porsiou-mor, nombr bras a
vatimanchou carguet a varc'hia dourerezou eus an
eneziou, ur c'hommerç a brospero.*

*Nombr bras a zemeziou d' vezo, ha eusi tout a
vezint eürus.*

Prediction general evit ar bloa 1839.

Ar Gouân a vezô divezad, clénvedus er gommançamant ba sujet d'ar rheu, etc., dre un avelou Nord a rëno er c'hreiz, ha na eessint nemet goude beza guennêt ar c'haeriou hac ar c'hampagniou eus a un erc'h qen teo, ma c'oumeto al loened godez calz ravach, defot boued, haç a viro ar beacherien d'en em laqat en hent. Ar fin a vezô scornec, gant frim ba glao.

Commançamant an Nevez-Amzer a vezô caer passabl. Ar c'hreiz a vezô mesquet a c'hlao m'adoberus ; e fin tom hac arneus. Al luc'hed hac ar gourua a vezô guelet ha clévet allies.

An Hân, er goamançamant, a vezô agreabl, aïchou un nebeud glao bian a rayo profita an edou, a vezô sclear, mes an damoezeennou hir ba founnus a c'hreun. Gouscende e vezô calz a ed dêved. Ar guiniz du a vezô abundant, amzer an hada o veza en em gavet commod. Didomagi arint al labourer eus e oll boaniou.

An Discar-Amzer a royo da goumanç amzer sclear. Ar c'hreiz cazi memes tra, sepet ur vrumen benac. Ar fin rust ha sujet d'ar c'hlénvèjou. An abondanç afrouez a vezô caus d'ar fluz, etc. Laqit eta evez m'ad.

Ar Chommerç a vezô florissant.

Predictionou general evit ar bloa 1840.

AR GOUAN A VEZO HUMID HA TENVAL ER GOMMANÇAMANT. AR C'HREIZ A ZIGASSO AVEL RETER, BURIFIÑO AN EAR. AR SIN A ROYO DEOMP UN AMZER RE'H HA SCORNEC, GANT GRIZILL HAC AVEL.

AN NEVEZ-AMZER A VEZO AGREABL AOÜALC'H ER OMMANÇAMANT. AR C'HREIZ A ZISCUELO AR PAREYER HAC AR PRAJAYER QER CAER HA MA ELLER EN DESIROUT. AR SIN A RAYO DEOMP ANCOUNAC'BAT ANTIERAMANT AR RIGOR EUS AR GOUAN TREMENET.

AN HÂN A VEZO TOM, MES EUS A UN DOMDER AMPERET, A BETRA E C'HOARVEZO UN EOST ABONLANT. EVIT AR PEZ A SEL OUS AN EAR, AN ARNEOU VEZO TERRUBL ABALAMOUR D'AR GRIZILL, PEHINI A ISTRUJO CALZ A BLANT VÂRZU AR C'HUS-EOL; MES IR VRO-MÂ NA-ZOUSFRO NEIRÀ EUS A GUEMENTSE.

Ar c'hanab hac al lin a brospero catz er blos-mâ.

AN DISCARG-AMZER A ROYO DEOMP UN AMZER AVORABL ESIT DASTUM AN ED, PEHINI A VEZO EN AR GANTITE QER BRAS EVEL MA ELLER EN DESIROUT, AR PEZ A RAYO DEZAN DIMINUI À BRIS.

Guelet e vezo, e cominçamant ar blos salz a sinou en edr. Meur a hini a sponto o sellet outô.

FIN AR PAONOSTICOU.



A V E R T I S S A M A N T

*Necesser bras da bep den evit ober abr
pourvision e dieuez, observez gant tud ancien.*

Ober pourvision ed ha dillac e mis Guengolo.

Ober pourvision güin e mis Du.

Ober pourvision queuneud hac amana
mis Mae.

Ober pourvision qic da sala e mis Qerzu.

Ober pourvision froues e mis Eost.

Ober pourvision pesquet e mis Guenveur.

Ober pourvision heaul ha soa e mis Here.

Prena neud e mis Meurs.

Prena Qezec, eugenet, saout ha denved
mis Ebrel.



PREDICTIONOU EVIT PEB Mis.

GUENVEUR.

Meuragueguin en em orno eus a blun ar paün.

C'HOEVRER.

C'hoari gaer evit ur menez ohenel ul logoden.

MEURS.

Fin terrubl eus a un den brudet bras.

EBREL.

Grenamant douar, apparition ur menez tan.

MAE.

Tempest var vor. Fin gloriis un den puissant.

EVEN.

Stereden losteq. Aoun hep drouë.

GOUERE.

Action gaer eus ur soudard yaouane.

EOST.

Eureou sod, hac a blich d'an den.

GUENGOLO.

Boneur ha maleur. Evelse e za ar bed.

HERE.

Chanchamant bras e meur a dra.

DU.

Nep a zer e lagad d'ar maleur, a grio d'e dro.

QERZU.

Brud brezel ha c'hoast peos'h.

